

Chanson Nevez.

(374)

Var ton : Son ar Melimer.

Ar Ghoas.

Debonjour d'éc'h, va douç Janned ; an daelou en daoulagad,
 Cetu me deut c'hoas d'ho quielet gent sonjal dont d'ho quittat ;
 Gent quittat an neb a gariam mui 'quemant tra zo 'r bed :
 Pebes calonad evidon, goude bea re garet !

Ar Plac'h.

Meurbet e zôn-me estonet, den yaouanc, ouz ho quielet :
 Sezisset oc'h eus va c'halon, ouz ho quielet qer mantrêt.
 Arrêtit... sec'hit ho taillon, ha disclêryet franchamant
 Petra sinifi ho comzoù, petra eo ho nec'hamant.

Ar Ghoas.

Ho temporanç, sur, va Mestrez, zo em c'halon qer parfet,
 Efen na ouffen-me birrigen en lemel eus va speret ;
 Rac c'houi n'oc'h eus nemet mepris ha disprisanz evidon,
 Anzarvit brêmâ hep fentis ha m'én em glem hep reson ?

Ar Plac'h.

Me voar ezoc'h rentet captif certen d'an amouroustet,
 Dre m'oc'h eus lagot ho speret da garout re euz objet ;
 Euz den yaouanc a dle bea mestr absolu d'e galon,
 Mes c'houi a zo, var a velân, gür esclav da Cupidon.

(375)

Ar Ghoas.

An amour, fra ve purifiet, a dremener dre an tân ;
 Ha va c'halonic, va Mestrez, a zo hanval bras ountân :
 Seulvui rit ouz va dilezjel, seulvui ran ouz ho caret,
 Ha ma zoc'h ouzin qer cruel, me zo douç en hoc'h andret.

Ar Plac'h.

Da betra 'teu't d'en em dale, den yaouanc ? d'an daorempret ?

Ne z'oujit mui en qementæ, rentit tranquil ho speret.
Lagit ar peoc'h en ho calon, ha z'oujit enni a grenn,
P'otramant hoc'h affection am zomplo a dra certen.

Ar Gwas.

Me ya brema d'ho tilezel evel eur Gananeen,
Mes me a grio mui-ouz-mui, gen a glêrot va feden,
Ha pa ho vo va approuvet ha gouezet ha me ho car,
E t'oufot neuze d'am c'harout gant eur c'haron hep e far.

Ar Plac'h.

(376) Caer oc'h eus clasc va zistrei gant ho comzo e locant,
Rac me a vo en hoc'h enep da vigen ferm ha constant.
Gent e tisplantfac'h ar stered demeus an ên gant ho tent,
Equet n'o pe va distroet, den yaouanc, divar va hent.

Ar Gwas.

Pell a zo demeus a amzer ec'h exercen an enor
Alies demeus a veach, va Mestrez, da doul ho t'or,
Da guichen toul d'or ho calon, o clasc antreal enni,
Mes c'houi a zo gen dirêzon, hac a deu d'am refusi.

Ar Plac'h.

Pell-amzer a zo tremenet, ha qeit all a dremenno,
Bigen james var va speret nep rêson sur n'ho pezo.
Me ho ped, deud d'am dilezel; rac-se-ta, choazit ho plac'h;
Birvigen sur n'ho qemeràn: hit-hu en hent gant ho sac'h.

Ar Gwas.

Evit ho contraign d'am c'haret, me ho ped, da viana,
Da z'oujal voamp hon daou choazet gant Adam, hon Tad gento;
Demeus al lezen naturel am forç d'ho carout ive,
Lennet è demp en Ariel, gout a rit se coulz ha me.

Ar Plac'h.

(377) Eleal assur, den yaouanc, certen ho carout a rân,
Pa è quir ho meulan bemde d'ar merc'hed eus ar vro-mañ;
Ma vijent em possession, c'houi 'rije 'r choaz anezo,
Mes evidon me a bromet birvigen sur n'ho pezo.

Ar Gwas.

Preciussa tenzor eun den, è certen eur galon bur,

Clementse a zo qer giirion evel ma ê ar Scritur :
 C'houi ê va zenzor, va Mestrez, ha Rouanez va c'halon,
 Ha ma on-me deut d'ho quielet, ê gant quier intantion.

Ar Plac'h.

Me oc'h anave, den yaouanc, evit eun den drol meurbet,
 Dre m'oc'h eus lazet ho speret da garout nep n'ho car get ;
 Mes choazit un all evidoc'h a ouffe ho consoli,
 Roc evidon n'allan pelloc'h chom amañ da ziscouri.

Ar Gwas.

Ho quittat a ran, va Mestrez, pa ê ret ho tileret,
 Mes evit se va c'harante a vezo bepret fidel ;
 Poent ê demp eta conclui, êchui ha lavaret
 Penos ê fachus da eun den carout hep bea caret.

Ar Plac'h.

Ho quittat a ran, den yaouanc, o rai dec'h evit gentel
 Ar c'honzoer caer-mâ, a lenner ebars er Scritur - Santel :
 Choazit Rouantelez Doue, hac e justiz da quenta,
 Gent ma vezo dec'h accordet hoc'h oll diezir er bed-mâ.

(378)

(Vol. VII, p. 374-378.)
 strophes non numérotées.